

Recit giirion

(442, suite)

Demeus ar maleurion korrupl c'hoarvezet an 8 eus a vis c'huevrer
diveza 1843, er Guadeloup, dre ur Grenamant - Douar hac un
Tân - Goall ar spouronussa, pere o deves distrujet ha pulluc'het oll
ar guer a Point-a-Pitr (1).

Var ton: An Haro hac an dey demerjet.

Pobl eus a Vreiz - Izel, Christenien generus,
C'houi pere voe atao giir vugale Jesus,
Selaouit, me ho ped, en haeno a Loue,
Ur recit truezus a doucho hoc'h ene.

(443)

En meurs, bars er bloa mil eiz, cant nao ha tregont,
E voe roet deoc'h oll un detaiill leun a spont
Var Grenamant - Douar enezen Martiniq,
Un andret ar c'haera demeus an Ameriq.

Hirio, ô va Doue! e zeus goassoc'h maleur
Da zont da zisclêria dec'h - hu oll, va breudeur:
Rac-se ta, Bretonet, tud a religion,
Deut d'am zelaou, m'ho ped, gant calz attantion.

Ur Grenamant - Douar demeus an korrupla,
An eiz a vis c'huevrer demeus ar bloavez - ma,
D'unnec heur nemet gant a zo bet c'hoarvezet,
Hac en ur minuten en deus oll distrujet -

Er Guadeloup e zeo arruet ar maleur:
Selaouit gant anqen, me ho ped, va breudeur.
An douar tro - vandro zo en em digoret,

(1). - Enezenn bras ar Guadeloup a zo ur c'holoni a Franç, situet en Ameriq. Eno eo bro ar suer,
ar c'hafé, ar butun, ar c'hoton, an indigo, etc.

An Point-a-Pitr, e pelec'h eo bet ar ravach, a voa ur guer gaer ha neve, batisset e 1753.
Tyer a 2 ha 3 estach a voa enni, ha 50 ru. Distrujet int oll bremâ.

Hac an oll tyez kaer en deus oll distrujet.

(444) Ar spouron, ar c'hri forç, a garg eus a horrol;
An douar a fourgas vel ar mor e fulor;
Hac evit cresqi c'hoas ur maleur gen eurzus,
An tain-goall zo dre oll gant un nevez furius.

Ar guæder a Point-a-Pitr zo rentet e ludu,
An desolation a ren eus a bep tu.
Ebars er sprac gen bêr demeus ur minutem
E zeus maro eno ouспен pemp mil gristen! (1)

An douar a fraille, ha deus an abimou
E velet gant spouron sortial ar flammou.
Caer o d'oa an dud qez clasq en em savetat,
Brêvet e voant qerqent dindan ar vein a blat.

Qer créen ha gen horruhl voa 'r c'hrenamant-Douar,
Ma laqe menezjou qerqent d'en em discar,
Pere o deus stanqet dre oll an doureyer,
Ar pez a gresq meurbet d'an dud qez o mizer.

Ar re o deus ellet beza bet achapet,
Zo privet a bep tra hac en oll revinet,
Rac an tain-goall horruhl a zevor a bep tu,
Hac a reduis peb tra en glaou hac en ludu.

(445) An dec c'huevver e zoat occupet trovardro
Da zigolo dre oll an dud qez voa maro:
Ar spont rac ar vocen a re qer bras horror,
Ma voet forcet neuze d'o stlepel bars er mor.

Tri goster an ilis zo en em discaret,
Var an hini chommet gant eston e velet
Cadran an horolach arretet var an heur
E pini voa c'hoarvet eus ar guæder ar maleur.

Tremen pempzec cant den demeus ar re vlesset
Zo ellet savetat gant ur soign ampreset.

(1).- Hirio e zoar ceterq eus a dremq 8000 den maro, hac a ouспен 600 blesset...

Oh! terrupla arvest zo eno da gompren :
 Sonjit, sonjit en ze, me ho ped, kristenien!

Gouarnner ar Guadeloup a sc'rif da gass sicour
 Ar buana possubl d'an oll zo hep recours ;
 « Hastit, hastit afo, n'an Doue, me ho ped,
 » Rac amä e vang oll : repu, dillad ha boued.

» Mein, brigennou, ha rä, qement zo necesser
 » Evit sevel tyer d'an oll zo er vizer.
 » Hastit prest, m'ho suppli. Oh! n'ellit get compren
 » Peguer bras eo hor poan, hon ezom, hon angen.»

(446)

Qement elfet scrifa var an oll maleuriou
 C'hoarvet er Guadeloup hac en e c'harteriou,
 N'elfe despeign] ervat an hornol arruet
 Er vro miserabl-se, ouz se bet assuret.

Mar deo hor Breiz-Izel, dre ar c'hraç a Zoue,
 Bet atao preservet a zeurt calamité,
 Rentomp gracoù dezän demeure ur seurt boneur,
 Ey eur dont da zicour hor breudeur er maleur.

Ar Guadeloup a zo ur goloni a Franç,
 A ðle en he maleur receo hon assistans ;
 Eno hon eus qerent hac ive mignonet,
 Hac a c'houlen ganemp ma vezint sicouret.

Ma vez ur seurt maleur, mes Doue da viro,
 O touguen ar ravach, o tistruji hor bro,
 Me er goulen ouzoc'h : na rec'h-hu get presset
 Ebars en ho maleur da veza sicouret?

Arabat e zë deomp, var digarez int pell,
 Mancout d'en em hasta da zont da rei sar zell
 Var hor breudeur christen, rentet qer maleuriou :
 Ey eur dont d'o zicour e plijimp da Jesus.

(447)

Pepini ac'hanomp, herves m'hon eus moyen,
 A ðle n'em ampessi evit dont d'o zouten.
 Ur quennequis benac, roet ey han' Doue,

A vo recompanset un deiz e gloar an êe.

Hon Roue generus, qerqent m'en deus cléret
Comz eus ar maleuriou a zo bet arvet,
En deus casset ractal ur som considerabl
Da zicour an dud qez rentet qer miserabl.

An nombr a victimou zo [justen eiz mil den,
Je a ra fremissa calon heb gür gristen.
Da drêgont million e za 'n danvez collet,
Ha daou-uguent million an tyer discaret.

Un orjac'h d'eur zoudard a gonfi e ruguel;
Ar seiz all, va Doue, o deus ranqet mervel!
Un all a lavare: ceta dim-me collet
Va fortun, va c'herent, ha va oll mignonet!

(448) En Point- a Pitr neus qet un ty hepqen er za;
Mes allas! va Doue! ar pez zo ar goassa,
Tud a bep oad dalc'het diindan an attrejou
A gri dont d'o zicour, hac a zo victimou.

An tã- goal furorus, vel ar mor e courmar,
A avañ hac a long ar pez zo 'n e bouvoar.
Ar paour, ar pinvidic, en douar digoret,
Pe en tã horverus o bez o deus caret.

Qement a dud maro a voe dizoloet,
N'ellet o enterri, ma voent qerqent dêret.
Ar flêr eus ar c'horfon a ro aon da bep den
Va zeufe prest goude en o zoues ar vocen.

Serifet eus da Mèriou a bep arrondissamant
D'ober ur sousscription hep fot incontinant;
Rac-se, va c'hennois, deposit hoc'h offranç
Ebars o bureauyou gant an oll gonfianç.

En kêr ha var ar meaz eus ar rouantelez
Eus sousscriptionou da zicour an dud qez.
Ar prima moyen eo, hac ar surra, hep mar,
Da zicour victimou ar c'hrenamant-Douar.

Anfin, en ilisou e vo ive qestet
Evit sicour an dud a zo oll revinet.
Pa lavar Jesus-Christ e zomp-ni oll breudeur,
Hastomp-ta da zicour ar re zo er maleur.

(449)

Ar maleur a zo bras, allas! ô va Doue!
Hor charité a ranq beza ta bras ive:
Pedomp ive Doue ma zay oll da repos
Ar re a zo maro, da joa ar Barados.

Gouarnamant ar Franç a zo en em hastet
Da zont da zoulaji an dud gëz, revinet:
Ur som considerapl, vit ar c'henta ezom,
Zo canet, da zepart goude ur brassoc'h som.

N'eo get en em dalc'het da laqat cass arc'hant:
E tri a borsiou mor e zeus ur vatimant
Larguet a lingeri, a zillad, a voespët,
Vit tud ar Guadeloup a zo oll revinet.

Oll autoriteou a Rouantelez Franç
A deu gant un hast vras da zigas o offranç;
Peb prefet a ordren ive d'e oll mériou
Ober qestou dre oll ha souscriptionou.

(450)

An oll esqeb er Franç, atao qer generus,
En andret an dud gëz, ve rentet maleurus,
O deus qerqent scrifet d'ordren d'ar bersonet
Vit en oll ilisou ma vije bet qestet.

Bremâ eo ret quelet ar generosite
Eus an oll gristenien, quir vugale Doue;
Ar paour, ar pinnvidic a ro a greiz calon,
Hervez m'en deus moyen. O caera aluzon!

Courach, tud generus! n'ouffet ober bigen
Un œuvr agreaploc'h d'hor c'hrouer souveren,
Rac ordren a ra deomp gant ar brassa dougder
Soulaji hon nessa p'en em gav er vizer.

Truzgarecaomp oll hirio ar Brovidanç

Ma zeo ar gribtenien qer generus en Franç.
Ra deuyo un Doue demeus a lein e droun
Da scuilla var ho[?] bro e venediction!

(451) Pequen douç eo ivez allout amâ donet
Da veuli calon vad hor breudeur Bretonet,
Pere zo qen hastus e peb calamité
Da zicour ar maleur, n'eus fors e pez contre!

Tud q'ez ar Guadeloup, ho pezet esperanç:
Breudeur mad a gavot dre oll ebars en Franç.
Laqit, laqit atao ho fizianç en Doue,
En hor Gouarnamant, er bobl hac er Roue. fin.

A. Lédan.

(452) Koer ha var ar meaz er vro-ze zo goloet oll a dud hac a ane-
valet maro. — Mervel a r'er gant an naon; en em difframma r'er ur
batatezen, ur grizien; dont ar'er da anlevi an anevalet achapet d'ar
maro. — An oll fornion a zo discaret; ar vagasinou bleud zo dindan
an douar pe dêvet; ar v'elinou zo distrujet: e zoar e prezanç ur guer-
nez horrupl. — Un ty scol merc'het discaret: 25 poteriez hac ar ves-
trez a zo ecrazet. — Guelet e zeus bernion t'ân o sortial diouz ar
môr, tost d'an aud. — Ur plac'h yaouanq, o clasq achap euz e z'y, a
zo discaret ha gemeret dre e diouar dindan ar vein. — Guelet a ra
gant spont an t'ân o tostât... Grial a ra da ur zoudard trec'hi dezj
e diouar: ar zoudard a zar e zabren, mes ar flammou en am-
pech da renta ar zicour horrupl[?] - se, hac ar plac'h maleurus a zo
reduiset e ludu!

Ar flêr eus ar c'horfon maro a zo qer cr'en, ma ranger o dêvi
gant ra beo qerqent.

Nac a horroliou, va Doue! Amâ ur famill antien ecrazet;
aont, ur c'horf trec'het dre anter; un all bruzunet oll; ur mignon
o terc'hel dorn e vignon, lazet o daou. — Ur plac'h yaouanq, ar-
ruet dec'h, hirio e diouar trec'het; un all, deut folls, a grie:
Perac caout aoun rac ur c'hrenamant-douar, na ouz e ty va mam?
— Un ozac'h a rede evel un disqiant, en eur disqeurz e voalen a
eured, hac o crial: letu amâ qement a chom ganen eus va famill!.....

Avoale'h eo ze.... tevomp.

(453) Ar Franç oll a hirvoud var ar maleur horrupl zo o prouez sqez
e c'holoni; — mes an druez pehini na ra nemet scuilla daelou hep qen,

90

a zo un druez difrouez : neo get avoalc'h meuli ur sonjebon vad . . .
ret eo sicour d'e executi.

Enor ha treugarez d'ar rouantelezeou all, pere a zo en em hastet
ive da zigass o offrançon.

A. Lédan.

Nota . Evit angagi ar bobl da zont dre e offrançon da zicour
...-dud maleurus, emeus composit ar voerz-mâ, hac imprimet en
nombr a zaouezec cant, a bere e meus roet 900 da sous-prefet Mon-
troulez, da zistribui evit netra, er finister, e costez ar nord hac er
Morbihan. An 300 all ameus laget renta dre ar post, divvan va
c'houst, ha roet amâ hac aont. Credi a ran en deveza va suit grêt
vad : va dezir brassa eo.

A. Lédan.

(Vol. VI :

p. 442-451 : Recit ... , 40 str. numérotées ;

p. 451-453 : divers événements racontés en prose.)